

Dornskridoù Milin : Kanaouennou

58. (BARZ EN TI KORN E MENE BRE) (E lein ar bajenn
 gentañ : Le Corre
 Gilles — iez
 treger)

barz en ti korn e Mene Bre
 tralalalalala
 me meuz groet eur vestrez neve

—
 bonjour va dousik minorez
 chetu me deut d'ober al lez

—
 d'ober al lez ha d'ho koulen
 digant ho mam ho kwir berc'hen

—
 da betra timeimp hon daou
 ha ni n'hon euz ket a vadaou

—
 ha ni n'hon euz na ti nag oz
 na gwele da gousket en noz

—
 ha ni gousko war ar raden
 eouit eun nosvez da drezen

—
 war hed eun daou pe dri de
 ni hon defo kaouet eur gwele

—
 evel ar gwenan a rafomp
 nefo^o netra pa gomansont ° (Gortoz a rafed: nefo,
 n'o devez)

dre forz poan kafsiont ho zi
 ha ri ives ma dous Mari

—
 an dud iaouank pa zimezont
 ferri eur jardin a dleont

—
 planta tri sort louzou ennhi
 poan hag anken ha milkoni

—
 louzeuen ar basiantet
 ha mont alies d'ho gwelet

—
 an dud iaouank a zonj ganthe
 e koue an aour a veg ar gwe

—

e koue an aour a veg ar gwe
a ve deliou melen a ve.

a ve deliou melen a ve
eouit rei plas d'ar re neve

gwaz na zonj ket ar baotred diod
e ve red kaout kaouel ha pod iod

ve red kaout kaouel ha pod iod
ha bleud gwiniz en eur chipod

eur c'hacuelik a goad rouan
hag a luskello he unan

eur c'haouelik vo great gant koad sab
a luskello gant beg an troad

a luskello gant beg an troad
ober krampoez ha ribotad

vvvvvvv

(Sell. ouzh Revue Celtique, levrenn 2, p. 245-47,
Soniig, kanet gant Mac'harit Fulup, a ro un destenn
heñvel-kenañ ouzh hini Jili ar C'horr. Sell. ives evit
lodenn gentañ ar son, an Uhel, Soniou Breiz-Izel, levr-
enn 2, p. 10 : Ann tiegez mad ; evit eil lodenn ar son,
an hevelep levrenn eus an Uhel, p. 20 : Plac'hig Coat-
Rouan, ha Bourgault-Ducoudray, Mélodies de Basse-Bre-
tagne, p. 19-20)